

Istor Breizh gant Visant Roue

Ha neuze, Visant, pegoulz e krog gant istor Breizh ?

Alies e liammer istor ar Vretoned gant o donedigezh en Arvorig. Ne'c'h eus ket lennet pe klevet frazennoù evel « ar Vretoned en em gav en Arvorig e-tro ar bloavezhioù 500 » c'hoazh ?

Geo, alies-kaer !

Ha graet e vez evel pa zeufe ar Vretoned eus ar vougidell a zo war mor Breizh, e-giz pa n'o dije ket un istor a-raok. Ha koulskoude eo dav mont da welet un tamm mat a-raok en istor, treuziñ ar vougidell dres hag aze e teu war wel kantvedoù ha kantvedoù a istor.

Petra zo en tu all d'ar vougidell neuze ?

Ar Romaned da skouer o deus skrivet kalz diwar-benn ar Vretoned, ouzhpenn 100 istorour ha douaroniour eus an Henamzer o deus lezet skridoù deomp, dedennus-tre int. Met dav eo mont pelloc'h c'hoazh...

Betek ar C'hresianed marteze ?

Dres. E gwirionez e ranker soñjal penaos e oa kont er mor Kreizdouar, da vare Aristoteles pe Aleksandr Veur pe pelloc'h c'hoazh : er 4e kantved a-raok Jezuz e ren ar C'hresianed war an aodoù hag ar mor, eus Egipt betek Marsilha. Hag e Marsilha dres ez eus un den, a zo Piteaz e anv, en deus c'hoant da c'houzout petra zo en tu all da strizh-mor Jibraltar, ar pezh a zo anvet « pilieroù Herakles » gant ar C'hresianed.

Ha petra zo en tu all just a-walc'h ?

Den ne oar pe pa lavar in mat ez eus bet savet un toullad mojennoù diwar un nebeud danevelloù deuet gant kenwerzhourien. Hag an Norzh a lak ar C'hresianed da hunvreal : eno e vevfe gourharozed, an Hiperboreaned. Piteaz a fell dezhañ gouzout da vat ha savet gantañ ur skipailh evit mont war ar mor bras. Ur pezh klaoustre eo.

Deuet eo a-benn eus e dro-gaer ?

Ya, mont a ra war-zu Arvorig ha da c'houde, dao dezhi war-zu an enezenn a zo pelloc'h en hanternoz. Piteaz a ra « Pretannike » anezhi.

« Pretannike » ?

Ya, abalamour m'en deus gwelet tud livet o c'horf moarvat. Diwar an anv-se e teu « Preden » deomp, a zo un anv all evit « Enez Vreizh », lec'h m'emañ ar Vretoned o chom, d'ar c'houlz-se, ar re-se en em gavo en Arvorig 8 pe 9 c'hantved diwezhatoc'h. Met se zo un istor all, e-keit-se o do ar Vretoned da dalañ ouzh ar Romaned hag ar re-se a raio gant

ur stumm latin eus « Pretannike » : « Britannia ».

Petra zo c'hoarvezet gant Piteaz goude ?

Aet eo pelloc'h c'hoazh, betek Skandinavia. Diaes eo deomp ijinañ na peseurt tro-gaer e talvez evit beajourien mor Kreizdouar met ur pezh tro eo : dizoloet e vo al lanvioù ganto da skouer hag ur bern pobloù ha broioù evel-just. Met pa vo distro Piteaz e Marsilha, ne vo ket kredet gant an dud. Diskaret e vo gant ar C'hresianed all a lavaro ez eus bet ijinet pep tra gantañ, ne c'hell bezañ nemet ur gaouaid anezhañ. Met tamm-ha-tamm, dre forzh beajoù all e vo komprenet eo gwir ar pezh a lavare Piteaz hag eilet e vo e skridoù gant Gresianed ha Romaned ar c'hantvedoù all. Gwell a se e vint eilet rak kollet eo bet skridoù Piteaz, e gwall dan levraoueg Aleksandria moarvat. Met ma fell deoc'h gwelet Piteaz, an hini en deus laket Breizh hag ar Vretoned da zont tre en Istor, kit betek Marsilha : hiziv-andeiz c'hoazh ez eus un delwenn vrav anezhañ. War ar porzh evel-just.